



Kimiad eur C'honscrit.

War eur ton nevez.

Va c'halon a zo frailet dre nerz va ankénio :
Em daou-lagad entanet na'n euz ken a zaéro ;
Allas ! deued eo an devez ma renkann dilézel
Lec'h kaer va bugaléach, ma bro dons Breiz-Izel.

Adieu d'id, va zi balan war leinig ar gréc'hen,
Tachennik c'hlaaz war pini buguel é c'hoarienn,
Gwez ivin ker bodenneg, en dishéol deus pé-ré,
E-pad tomder an hanvou, é kouskenn da greiz-té.

Adieu, va mamm ha va zad, bréman n'espérit mui
E chomfé ho map karet vid harpa ho kospi,
Vit pourvéi d'hec'h bara, vel ma peuz gret d'ézan ;
Al lezen zo didrué, ho kuitad a renkann.

Nag a wech ma mamm déner, é rankéfet gwéla,
Pa zeui va c'hi ankenied ouz hoc'h da'n em frola,
Pa wellfet barz ann oaled va skobellik goulllo,
Hag ar c'henvid o steui deus va fenn-bas déro.

Adieu, béréd ar barroz, douaro benniget,
A c'holo va zado koz gant Doué bet galvet ;
Da wél ann anaoun klemmuz, o'inn mui war ho pézio,
Da skuilla ann dour santel mesket gand va daéro.

Adieu, va muia-karet, va dousik koant Mari ;
Eur blanéden dirémed a zeu d'hor glac'hari ;
Hon éurusted, hor joao skédou zo tréménét,
Vel ar goumoulen skauvik gant ann avel kaset.

Na wélinn ken da lagad ker lemm a ker léven,
O virvi a blijador, du-zé, pa erruenn,
Da zornik wenn ker distak o kas ar c'harr enn dro ;
Da vouez dous ken na glévin o kana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatékismou, hon daou c'hoaz bugalé,
Hor c'halono ténérak dija en em glévé ;
Dirag Gwerchez ar c'hoaz-hent nag a-wech e touéjomp,
Na etrujé birviken disparu étre-z-omp.

— 2 —

laouank ha dizoursiuz, allas ! né wiemp ket,
 Pégément a enkréziñ er vué zo mesket ;
 Ewit omp né oa neuzé lezenno na roué,
 N'anvéemp merd eul lézen, hini ar garante.

Adieu, va nez amezeg, Iannik, va gwir mignon,
 Kamarad va c'hoario, va breur dré ar galon ;
 Piou, ziouaz ! a gemero eul lod deuz va seanio ;
 Piou, bréman, pa vin séder, gant-é-me a c'hoarzo ?

Hep da vreur té iel bréma er parrosio nésa,
 Da bizosad al leurio, bars al lazo dorna ;
 Heb onn, té iel da zisput maoud ar c'hourennadek,
 Da sacha war ar zéien, é-bars ar varadek,

Adieu, va c'hi kez Mindu, va leal kamarad,
 N'effomp ken deus ar beuré da glask roudo ar c'had,
 Na glévimp mui er méné da chilpaden skiltruz ;
 War va dorn mui né zantion da déod karantézuz.

A-benn eun neubeud amzer, kals a vignoned ien
 Barz ar zoudard divroed, m'oar vad, né zontfont ken,
 Mes da galon-té, Mindu, n'éo ket ken ankouéuz ;
 Pell é ri c'hoaz va c'hanvo dré da lezo klemmuz.

Adieu, va c'hazek vélen, skan ével eunn héiez,
 Mistr ével eul logoden, koant evel eun oanez ;
 Né d'zantion mui, dindannou, gand ann hast o tripal ;
 Ma daouarn mui na stagfont ar zéien var da dal,

Adieu holl blijadurio, foario, pardonio gé,
 Soubenno tez, noz-vécho, festo, leurio névé,
 Embado ker birvidik, binioù stard ha sklinton,
 Né drido ken va c'halon gand da zonio lizhin.

Adieu kéمند a garann, adieu da virviken ;
 Pell deuz a Vreiz, mé varvo, mantret gand ann anken ;
 Béa'z euz plant kizidik da chom lec'h m'int krouet,
 A wéleur o tizec'ha raktal m'int divroet.